

JYM 26

Pardon Sant-Mikael

I

Da oan . me bihan, bihanik,
 Da oan . me bihan, bihanik,
 er gêr e ti va ziad.
 Farlaridon, laridene .
 er gêr e ti va ziad .
 Farlaridene don de !

2

Me voe k'aset d'ar sholoch,
 'vit beza desket mat .

3

Da oa deut poent ar midi,
 me voe k'erchet d'ar gêr !

4

Nak evit mont d'ar pardon,
 Da pardon sant Mikael .

5

Me lavare d'am c'hamarad,
 : " O kaera plac'h yaouank ! "

6

O ! na kaera plac'h yaouank,
 zo e pardon sant Mikael .

7

Ma kredfen mont d'he fedi
 Da zonet da zansal .

8

Ma kredfen lavaret d'ez
 ez afen d'he c'has d'ar gêr .

9

D'am c'has d'ar gêr, den yaouank,
 en dra-se ne reot ket .

10

Rak me a zo er gouent
 vit beza leanerz

11

M'am bife bet c'hoant dimezi,
me vije dimezet mat.

12.

Na da eur certen den yaouank
a gichen ti va zad.

13

E dad a oa eur c'halvez
e ramm h'emeneres.

14.

Hag a labourer en templ
da ober dantelez.

an I. noret
Euz Eusa
eul Levenn.